



# Sekretour·ez divyezhek ar velestradurezh - skolaj / lise G/M

---

Kinnig labour embannet d'an / ar lund 06 juillet 2026

Lec'h : **Gwened**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh **3 miz**

**Fin miz eost**

## Deskrivadur ar post-labour

Emañ ar Skolaj-Lise Diwan ar Mor-Bihan e Gwened o klask ur sekretour·ez divyezhek skolaj / lise (G/M) evit kreñvaat ar skipailh e-pad 3 miz gant ar pal kas da benn al labour ouzhpenn e liamm gant an distro skol. Dindan atebegzh renerezh an ti skol e kenlabouroc'h gant holl izili skipailh ar skolaj : renerezh, buhez skol, skipailh kempenn, kelennerien, dilenidi Kuzul merañ ar skolaj.

## FIZIET E VO ENNOC'H :

### Sekretourva boutin

- Degemer an dud war-eeun ha dre bellgomz ha kas anezho e darempred gant an dud dave.
- Degemer ha treuzkas al lizhiri.
- Degemer ha treuzkas ar mailoù.

### Sekretourva pedagogel

- Ebarzhiañ an holl ditouroù a bouez evit ar familhoù, merañ an teuliadoù enskrivañ, kas anezho d'ar familhoù hag ober war dro enrolladur ar skolajidi-liseidi en diazezoù akademikel. Dreist-holl e-barzh SIECLE (Système d'Information pour les Elèves en Collèges et Lycée pour les Etablissements) a zo un diazez pouezus tre evit skoliadur ar skolajidi-liseidi hag AGATE (meziant implijet er skolaj-lise evit mererezh an ti skol).
- Daremprediñ gant ar rektordi diouzh an ezhommoù : teuliadoù kelennerien, beajoù...
- Sevel pe prientiñ a bep seurt teuliadoù a sell an ti skol hag e vont en dro, da skouer (listenn diglok) : raktres niver a vugale, yalc'hadoù, treziad diavez (forfait d'externat), steuñv an emgavioù pedagogel, heuliañ ar gevrat gant ar stad.
- Kenlabourat a dost gant kontouriezh an ti skol evit a sell faturenniñ ar familhoù ha merañ ar burchaserien.

### Skiant-prenet ha barrezhioù goulennet

Skiant prenet war ar sekretourva a vo ret kaout evit dec'hel ar post-mañ.

Evit ar post-mañ eo ret bezañ evezhiek, emren ha bezañ aes gant an dud.

Ret e vo deoc'h mestroniañ ar poelladoù-mañ : word, excel, google workspace.

Bez ho po da implijout ivez poelladoù all a sell merañ an ti skol (Pronote, poelladoù akademiezh). Bez e rankoc'h eta bezañ en ho aes gant an urzhiatarez.

Evel just eo ret deoc'h mestroniañ ar brezhoneg kenkoulz dre skrid ha dre gomz evit bezañ dibabet, live B2 (DBY) d'an nebeutañ.

## TITOUROÙ ALL

Deiziad enfredañ : Fin miz Eost

Doare kevrat : Kevrat termenet 4 miz pad – Kresk sammad labour berr pad

Padelezh amzer labour : 35e dre sizhun

Gopr : forc'hig 1867.02€ kriz miziek ha 1944.49€ kriz miziek

Lec'h labour : Skolaj-Lise ar Mor-Bihan – 13 straed de Michel de Montaigne 56000 GWENED

Ma z'och dedennet gant ar post, trugarez da gas ho emstrivadur a-raok an 23/08/2026 (CV + lizher emginnig) da tuta@diwan.bzh pe kit war lec'hienn Diwan, ivinell « Dibab Diwan » -> « Labourat e Diwan » ha loskit hoc'h emstrivadur (CV+Lizher en em ginnig).

---

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/secretaire-d-administration-scolaire-bilingue-h-f-060720261602>